

Kantik Sant Philibert



TON : *Breudeur ni glev ho klemmou.*

*Sant Philibert, hór patron,
Selaouit hor peden,
Gant fizianz a greiz kalon,
Ni 'ra deoc'h hor goulen,
Varnomp, var tud hór parrez
Skullit puill ho pennoz,
'Ma vo santed hor buez,
'Vit mont d'ar Baradoz.*

1.

*Yaouankik e z'oc'h kasset
Da balez ar Roüe,
Hag o peuz eno mirét
Holl gened oc'h ene ;
Grit eur zell a vadelez
Ouz hór bugāligou,
Ha lilien an elez
'Vo en ho c'halonou.*

2.

*N'o poa nemet ugent vloaz.
O tilezel ar bed,
Varlec'h Jezuz hag he groaz
Mall oc'h euz da gerzet ;
Elec'h madou danjuruz
E plij deoc'h ar beden,
Ha d'ar gouent e z'it eüruz
Gant ho mignoun sant Ouen.*

3.

*'Vit goudori oc'h ene,
Jumiej o peuz savet,
Jumiej eo, drè c'hras Doüe,
Ho neiz muia-karet,
Hag eleiz a ziskibien,
Er joa, el levənez,
Ganeoc'h ouz ar bec'herien
A zesko kaout trüez.*

4.

*C'hui zo bet ouspen eur vech
Gant kalz drouk-prezeget,
Ha daoust ma z'oac'h direbech
En eur prizoun taulet,
Heb en em glemm, e pedit
'Vit an drouk-prézeger,
Ha laoüen e pardounit,
'Vel ma reaz hor Zalver.*

5.

*Mez ma z'eo braz ho touzder,
Eo braz ho nerz-kaloun,
Rak d'eun tyrand, he zever
A ziskouezit heb aoun :
« Ebroïn, oc'h euz lavaret,
Roit d'an Iliz ar peoc'h.
Pe justiz Doue kounnaret
A goüezo stard varnoc'h ».*

6.

Siouaz ! 'vel guechall Ebroïn,
Tud fall en hon touiez
A ra d'al lezen divin
Eur brezell didruez ;
Ho sikour a c'houennomp
Evit difen hor feiz,
Ma vezit ato ganeomp,
Den n'he zенно deuz Breiz.

7.

En enezen Noirmoutié
O peuz pell-braz bevet,
Ero servicha Doüe
'Zo bet ho c'hoant bepret,
Ar brud euz ho vertuziou
A dreuz ar Frans a bez,
Donezoun ar miraklou
A verk ho santelez.

8.

Unan a ioa hir amzer
O c'houazaon kalz a boan
Gant eur güentl ken dizesper,
M'oа var he dremenyan,
Sin ar groaz a rit varnhan,
Pebez burzud ! Kerkent
An drouk a dec'h diouthan,
Yac'h oa 'vel diagent.

9.

Martolodet euz hor bro,
E spount hag en anken,
'Ioa e danjer a varo,
Tostik doc'h enezen,

Ganeoc'h int bet diouallet,
P'edont holl heb skoazel,
Diouallit c'hoaz, ni ho ped,
Martolod Breiz-Izel.

10.

C'hui o zo skeduz er c'hloar
Gant ar Zent en Envou.
Mez ganeomp var an douar
E chom ho relegou,
Eul Iodennik anezho
'Zo bet roet d'hor parrez,
Eun tenzor braz e vezo
Da gaérât hor büez.

11.

Ia, ma zoc'h bete-vrema
Ken douz en hor c'henver,
Eo red deoc'h neuze beza
Eun tad muioc'h tener,
Netra ne c'hellit refuz
Hirio d'ho pugale,
C'hui 'pezo digant Jezuz
Peb mad 'vit hon ene.

12.

Sant Philibert benniget,
Dreist-holl ni a c'houlen
Béva bepret unanet
Gant al lezen gristen,
N'or beuz nemed eur galon
Ama d'oc'h hénori,
N'or bo nemet eur galon
Er bed-all d'ho meuli !!!

Imprimatur :

F. CORRIGOU, Vic. gén.

— 19 Juillet 1901.